

Ar Vuhez Kristen



— Hon tad Santel ar Pab Pi XI^{et} —

— Doue e bardono ! —

LENNIT PIZ

KEMENT-MAN

Priz ar gelaouenn :

“Ar Vuhez Kristen” hepken :

Koumanant ordinal : **10** lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :
15 lur

Ar Vuhez Kristen ha Kenteliou St Fransez

Koumanant ordinal : **13** lur

Koumanant a enor (gant perz e 365 oferenn) :
16 lur,

Kenteliou Sant Fransez hepken :

3 lur (eur skoed)

SKRIVA DA :

Monsieur le Directeur de « Ar Vuhez Kristen »

Couvent des Capucins

C. C. 209-81 Nantes

ROSCOFF (Finistère)

Taolenn ar miz

Hon Tad Santel ar Pab Pi XI ^{et}	p. 43
Setu an hader o vont da hada.....	p. 45
Boutaouer-ler Sant Jozef.....	p. 47
Kimiad ar misioner.....	p. 50
Dirak ar Boan, petra da ober?.....	p. 52
Ar ganaouenn goz.....	p. 53
Gouel Maria-Veurz.....	p. 55
Eur gerig n'eo netra.....	p. 56
Jezuz-Krist hag e relijion.....	p. 57
Huanadou ar pec'her.....	p. 59

5^{et} bloavez

MEURZ 1939

N° 3

Ra vezo meulet Jezuz-Krist !.. Bepred



Kenteliou Sant Fransez

KELAOUENN AN DREDE-URZ —

Priz evit eur bloaz : eur skoed (3 frs)

An holl liziri a dle beza kaset da : R. P. Eugène Le Quéau,
Couvent des Capucins, Roscoff, (Finistère). — C/C. 291-62 Nantes.

Va Breudeur ha va C'hoarezed ker,

Setu deut adarre amzer santel ar c'horaz...

An Iliz he deus gwisket he dilhad glazruz hag an aoteriou
noaz hag hep bleunv a ziskouez ez eo deut amzer ar binijenn...

Hag an amzer a binijenn a vezo ivez eun amzer a bedenn,
eun amzer ma vo gwelet an dud fidel oc'h en em voda en-dro
d'ar Groaz evit lenn ar c'henteliou skrivet warni gant Hor
Salver.

Ar groaz a zo bet evit Hon Tad sant Fransez ar sourzenn
eus e garantez e-kenver Jezuz. E-harz he zreid eo en deus
komprenet ivez pegement en deus an Aotrou Doue hor c'haret.

Evit e vugale eus an Drede-Urz, ha n'eman ket ar mare
da sonjal mat e-kement-se ?

**

Digoromp buhez sant Fransez. Petra lennomp enni ?

A-raok beza distroet ouz Doue, edo eun deiz e kêr Spoleto.
Dre e gousk e welas eur palez bras-kenan, leun a armou; war
an armou-se e oa eur merk : ar groaz, hag, e-kichen, e oa
eun itron skedus ha koant-meurbet. Hag eur vouez o lavarout
d'ezan :

« Ar palez, an armou hag ar plac'h-se a zo d'it. Kemer
anezo ! »

Franzez a zistroas rak-tal da Asiz.

Eun nebeudig amzer goude, edo o pedi e chapel vihan sant Damian, dirak eur groaz. Ha setu Jezuz, diwar ar groaz, o lavaret d'ezan :

« Fransez, va iliz a gouez en he foull, kerz ha rapar anezi ! »

Hag an den yaouank pinvidik, evit senti ouz mouez ar groaz, a zeu da veza eur mansoner, a gest mein, a labour ar pri-raz hag a rapar mogeriou sant Damian.

Kement-se holl a goust d'e youlou fall, dreist-holl d'e ourgouilh, met n'eus forz, ne chom ket da varc'hata. Evit ober bolontez Jezuz war ar groaz, e vezo izel a galon, kement ha ma vo ret.

Diwezatac'h, dirak Eskob Asiz, e silapo a-gostez, e-harz treid e dad, e zilhad hag e arc'hant, e kemero evel gwiskamant eur sae paour ha, war-ar sae-se, e raio gant raz eur groaz, evit diskouez d'an holl ez eo diskabl d'Hor Salver Jezuz-Krist !

Pelloc'h c'hoaz e welomp Fransez o tistrei eus Rom gant e ziskibien. Laouen-bras eo ! rak an Tad Santel ar Pab en deus aotreet e reolenn a baourentez hag a binijem; hep-dale ez int da loja e Rivo-Torto e lochennou bihan... dindan skeud ar groaz !... eur groaz koad savet plom e-touez al lochennou.

Eno e vo an novistial evit an Urz nevez. Eno e tesko ar relijiused anaout ha karet Hor Salver stag ouz ar groaz.

Ha Fransez a vezo o c'helenner... ha pebez kelenner ! « Goude ar Werc'hez ha sant Yann, eme Bertele a Biz, n'eus sant ebet hag en defe kement karet poaniou Hor Salver war ar groaz ! » N'anavezse ha ne felle d'ezan anaout nemet Jezuz ha Jezuz stag ouz ar Groaz.

Ar garantez-se evit ar Groaz, sant Fransez en deus he lezet gant e vugale evel eun testamant. I eo o deus skignet dre ar bed an deposion da Hent ar Groaz.

Ni ivez, va Breudeur ha va c'hoarezed ker, karomp ar Groaz; roomp d'ezi en hon tiegeziou ar plas a enor ha sellomp alies outi gant karantez. Hi a ziskouezo d'eomp, evel d'Hon Tad sant Fransez, madelez dispar an Aotrou Doue en hor c'henver.

Hag hor buhez a chanjo war ar memes tro ha ni a gerzo war hent ar santelez. Rak, pegvir en deus bet Doue evidomp ken bras karantez, ha n'eo ket just e vijemp d'hon tro karantezus en e genver ha fidel d'e lezemou ?

Ya, evel Fransez, karomp ar Groaz; evelltan, kerzomp kalonek war roudou Hor Salver !

Hon Tad Santel ar Pab Pi XI a zo maro



... Holl vugale sant Fransez eus ar Genta, an Eil hag an Drede-Urz a bedo kalonek evitan.

Holl e komuniint evitan.

Eun dever eo evito, rak Pi XI a oa evito, neket hepken eun tad, evel ma 'z eo evit an holl gristenien, met ivez eur « BREUR » en Drede-Urz.

Er memes amzer o devezo sonj pegement a zoujans hag a resped en doa sant Fransez evit Vikel Jezuz-Krist war an douar, hag e c'houlennint digant an Aotrou Doue grasou nive-rus ha talvoudus evit ar Pab nevez.

I. — Evit anaout gwelloc'h an Drede-Urz...

lennit

LES ACTES DU CONGRÈS DE LOURDES

(priz : 11 l. dre ar post)

LES ACTES DU CONGRÈS DE CLERMONT-FERRAND

(priz : 6 l. dre ar post)

II. — Evit skigna an Drede-Urz...

roït da lenn

LE TIERS-ORDRE DE S. FRANÇOIS,

patron de l'Action Catholique

(priz : 7 l. dre ar post)

N.-B. — Kement Breuriez a fell d'ezi beva, a dle kaout al leoriou-se. O goulenn a c'heller digant : P. Eugène LE QUÉAU, Couvent des Capucins, Roscoff, FINISTÈRE; c. c. 291-62, Nantes.

GOUELIOU HAG INDULJANSOU AR MIZ. — MEURZ 1939

Deiz	GOUELIOU	Indul.
1 M	<i>Pevare amzer</i>	
3 G	<i>Pevare amzer</i> ; evit gouel Hent ar Groaz.....	A.J.I.P.
4 S	<i>Pevare amzer</i>	
5 S	Eilvet sul eus ar C'houraiz.....	I. P.
6 L	Santez Koletta, G.....	I. P.
9 Y	Santez Katel a Vologn.....	I. P.
19 S	<i>Pevare sul eus ar C'houraiz</i>	A.J.I.P.
22 M	S. Benvenu, eus ar I U.....	I. P.
25 S	GOUEL-MARIA-VEURZ.....	A.J.I.P.
28 M	S. Yann a Gapistran.....	I. P.
30 Y	S. Per Regalat, K. eus ar I U.....	I. P.

EUN TAOL-LAGAD WAR VA BUHEZ : *dirwar-benn ar binijenn.*

1^o — An Iliz ha va Reolenn a verk d'in pinijennou da ober : ar yun hag ar vijil e-pad ar c'houraiz, ar *Pevare-amzer*, d'an deiz a-raok gouelioù a zo, dreist-holl d'an deiz a-raok gouel ar *Werc'hez* konsevet hep pec'hed hag hini sant Fransez.

Ha n'em eus ket lezet a-gostez ar pinijennou-se hep rezon vat ebet, hep aotre va Zad kofesour ?

2^o — E-touez ar pinijennou, lod a zo merket, gourc'hemennet; lod all n'int ket.

Ha n'em eus dilezet ar re genta, evit ober pinijennou choazet ganin va-unan, evit ober diouz va fenn, kollet ganin marteze pep merit dirak Doue ?

3^o — Ha n'em eus bet komzet eus va finijennou evit en em fougeal ?

4^o — Ma n'hellan ket ober ar pinijennou merket d'in gant an Iliz pe va reolenn, ha klasket em eus, da vihana, beva diouz ar spered ar binijenn, gouzanv gant pasianted ha kinniga d'an Aotrou Doue an holl boaniou a zeu d'am gwaska ?

HON ANAON. — *Kastellin* : Franseza Floc'h; *Gouezec* : An I. Le Roy; *Tourc'h* : Loeiza Grill.

— Ar re a zo bet er *Retred galleg* (eus an 23 d'ar 27 *Genver*) o deus en em blijet kenan...

— ... Ar re a yelo d'ar *Retred brezoneg* (e *Kemper eus ar 16 d'an 20 Here*), a raio muioc'h c'hoaz.

— Adalek breman en em breparomp !

Imp. LE BAYON-ROGER & C^{ie} - Lorient.

Le Gérant : G. LE BAYON.

Hon Tad Santel ar Pab

Pi XI^{vet}

Doue e bardono !

Maro eo Hon Tad Santel ar Pab...

Aet eo d'ar bed-all an hini a zalc'he war an douar-man plas Hor Zalver Jezuz-Krist...

Sammet eo bet gant eur barrad lamm-kalon ha berr-alan, digwener vintin 10 a viz C'houevrer.

Rentet en deus e ene da Zoue en eur lavaret ar c'homzou, ken c'houek da galon Sant-Fransez « Deus meus et omnia... va Doue, va holl vad ! »

**

Ganet eo bet ar Pab Pi XI^{et}, Achille Rati, e kerig Desio, e-kichen Milan, d'an 31 a viz Mae 1857.

D'an 13 a viz even 1921 e voe hanvet Arc'heskob Milan, hag, eiz miz diwezatoc'h savet war gador Sant Per.

Sturiet en deus eta bagig Sant Per, e-pad seitek bloaz, dervez evit dervez koulz lavaret...

Ha pebez sturier ampart eo bet... !

**

Sebezus eo gwelet ar bed a-bez e-kaon d'ezañ... Ar broiou katolik a-dra-zur a zo bras o glac'har... Re vat e ouzont pebez Tad mat o deus kollet.

Met ar broiou digristen ivez a zo e-kaon... E kement korn eus ar bed, dre ar c'helaouennou hag an T. S. F., eo bet kanet meuleudi ar Pab distroet da Zoue.

Juzevien, protestanted, framasored, sosialisted, komunisted, diktatourien lorc'hus, holl o deus pleget o fenn gant doujañz dirak « an den koz gwisket e gwenn », a reomp-ni anezañ gant kemeret a garantez « Hon Tad Santel ».

An holl dud digristen-se, o deus bet kavet ar Pab war o hent...

ar sosialisted, evit e glevet o kondaoni o c'hredennou dizoue...

Ar gomunisted, evit o diskouez d'ar bed a-bez evel gwasa enebourien ar peoc'h hag ar frankiz en eur vro...

an diktatourien digristen, evit klevet gantan, krak ha berr, n'o doa gwir ebet war ene ar poblou e oant en o fenn... n'o doa gwir ebet kennebeut da laza tud evit deski d'ezo beva...

ar franmasoned fallakr, evit klevet gantan ar wirionez, kalet da glevet koulskoude, war dachenn ar briedelez hag an deskadurez kristen...

Meuli a reont hirio ar Pab, difennour kalonek ar wirionez enep ar gaou, embanner bras sklerijenn an Aviel e-mesk pep seurt kredennou tenval, prezeger taer ar peoc'h e-kreiz eur bed, klañv an dud ennañ gant ar c'hoant en em laza.

D'ar bed a-bez, epad 17 bloaz, hep aon rak den na netra, Pi XI^{vet} n'eo ket bet ehanet da ziskouez ar wenojenn lugerinus, an Aviel, a ro levezeg er bed-mañ ha baradoz er bed-all.

*
**

Bet eo bet ar Pastor mat, en deus roet da glevet d'e zeñved, e vouez kreñvoc'h eget grosmol ar c'hirri-nij ha kurun ar peziou-kanol.

Bet eo bet ar Pastor mat, en deus kinniget ha roet e vuhez evit silvidigez e zenved.

Maro eo ar Pastor mat...

Gullo eo hirio palez ar Vatikan, evel ma vez goullo eun ti pa vez nevez aet an tad d'ar bed all...

Met, marteze, araok ma vo bet lennet ganeoc'h ar c'homzou-man, ho pezo klevet kleier hon ilizou o kana Te Deum ar Pab nevez...


Mervel a ra ar Pabed, iliz Jezuz-Krist avat ne varv ket. Pi XI^{vet} a oa ar 266^{vet} Pab.

Dizale e teuio an 267^{vet} hini.

Pedomp evit an Tad mat aet d'ar bed all...

Ra blijjo gant Doue rei d'e servijer fidel « al leac'h a sklerijenn, a freskadurez hag a beoc'h ».

AR VUHEZ KRISTEN.



Setu an hader o vont da hada

An hader bras...

eo C'houi, o Doue, hon Tad... C'houi hag ho peus krouet ar bed, ha, goude beza renket ennañ pep tra, ho peus lavaret d'ho Mab, hor Salver Jezuz-Krist « It hag hadit an douar-se... »

Hadit an douar tamm ha tamm... Da genta, trempit an douar-se gant ho kwad, ha skuilhit warnañ greun ar wirionez hag ar garantez...

Hag eo aet ar C'hrist da hada...

Kemeret en deus gantan eun dousenn labourerien... Ar re-mañ, d'o zro, o deus kemeret re-all... haderien, eosterien, mistri da deurel evez war al labour, ha da rei kuzul evit e gas da-benn... ha, dreisto holl, eur Mestr bras...

An haderien, ar eosterien, ar mistri, ar Mestr bras..., ar re holl a labour e park bras hor Salver, o anaout mat a rez.

Ar re-se eo ar veleien, ar visionerien, an eskibien, hon Tad Santel ar Pab... hag, a-unan ganto, kement kristen gwirion a zo o labourat evit mat ar relijion...

Hag e-touez ar gristenien-se, emañ te ivez... te paotr yaouank diwar ar maez... gant da voutou koad... leun bri pe leun-deil... gant da zaouarn frailhet gant ar goañv...

P'ac'h eus roet da hano d'ar J. A. C., ec'h eus roet da c'her d'ar C'hrist, e rafez mat da damm labour, en e bark...

Hag epad ma hade, e kouezas lod eus ar greun a-hed an hent.

Epada ma hade... Piou'ta eo an hader-se ? Jezuz-Krist. Hen, hag hen hepken, eo an hader bras.

Met, drezomp-ni eo e ra e labour... dre hon daouarn, dre hon treid, dre hor muzellou...

Ar greun eo komzou Hor Salver Jezuz-Krist... hor c'homzou ni ivez. Kement komz a lavarez, potr yaouank, a vez kavet mat pe kavet fall gant Hor Salver Jezuz-Krist.

Komzou lavaret en ti... e-kreiz ar park... war ar blasenn foar... war an hentchou, o vont hag o tont gant da gamaladed... setu ar greun o koueza a-hed an hent.

Sonjet mat ac'h eus ?

Hag e voe debret ar greun gant al laboused.

Pa vezer oc'h hada, e vez kollet atao eur tamm greun bennak... Doue a fell d'ezañ o defe al laboused o begadig... hag an dud ne vezont ket paouroc'h.

Met, e-touez an dud, prest da lammat war gement greunenn vat a hadi... nag a laboused !

Piked, teodou binimus d'ezo... hag a glasko dispenn d'it da vrud vat... « Perak'ta emañ hennez o klask ober skol d'ar re all ? »

Filiped ha n'ouzont nemet gragailhat war eur bern kaoc'h-kezeg... kilheien lor'hus ha n'ouzont nemet kana war an teil... houldi pounner ha n'ouzont nemet turia ar vouilhenn... d'ridi pennou-skañv ha n'ouzont nemet nijal eus an eil park d'egile...

Stank eo marteze an dud henvel ouz al laboused-se...

Ne dalvezo ket ar boan d'it prezeg d'ezo... Koulz e vefe d'it hada greun en eur porz-yeur...

Hag e kouezas lod all eus ar greun war an douar meinok.

An douar meinok eo skeudenn an eneoù n'heller ket mont douar enno... Mein o fec'hejou o deus kaledet an eneoù-se... daoust ma seblanter gwelet douar mat war c'horre...

Dont a c'hello ar greun da veza yeotennigou glas... met dizec'het e vezint buan. Hep dale e teuint da veza foenn, da c'hortoz ober teil...

Kavet ac'h eus, war da hent, an dud-se...

Hirio emaint leun a dan ha leun a galon... prest da rei an dourn d'it... met diwall !

Warc'hoaz o c'havi dizeblant ha fallgalonet holl...

War an dud-se n'hellez ket korta evit labourat park Hor Salver...

Hag e kouezas lod all eus ar greun en douar mat.

An douar mat eo da ene, da galon d'it te, potr yaouank. En em laket out e renk soudarded ar C'hrist...

Met, zoken en douarou mat, e vez kavet mein ha louzeier fall... Skrabet e vezont ivez gant al laboused... Da berc'hen an douar eo eta teurel evez.

Te ivez a rank beilha war da ene... labourat gant kalon... c'houenat... hag e zerc'hel bepred digor evit digemer ar greun mat.

Da ene a rank beza eur park eus ar re wella... naon ha sec'hed d'ezan da welet o sevel, o tiwan hag o tarevi ennan ar Furnez... ar Glanded... ar Wirionez...

Dalc'h da ene yac'h...

Hag e vezo pinvidik... pinvidik dirak Doue...

Hirio pinvidikoc'h eget deac'h...

Warc'hoaz pinvidikoc'h eget hirio...

Eur potr yaouank, roet gantan e c'her da Zoue d'en em wellaat ha da glask gwellaat e vreudeur... a zo evel eur beleg...

Bemdez, e tle pignat ouz ar aoter d'en em unani gant e Salver. Jezuz-Krist ne ra nemet unan gant ar wir gristenien... Ha Jezuz-Krist, stag outan an holl wir gristenien, a rank kreski ha kaeraat bemdez...

Kompren a rez breman, potr yaouank, eo ret d'it lezel da Salver da hada ar greun mat en da galon, evit ma c'hello eun dervez, eosti 30 evit unan, 50 evit unan... 100 evit unan... ha, goude-se, maga eneoù an dud all gant ar greun mat eostet en da ene.

D.

Boutaouer-ler Sant Jozef



Eur gontadenn spagnolek eo an istor-man... eur gontadenn nemetken. Gouzout mat a ra pep den, n'hell ket beza chanchet stad eun ene, er bed all. Er stad ma varv e rank chom. Met diwar ar gontadenn-mañ, al lenner a ouezo tenna eur gentelig a fiziañz e galloud Sant Jozef, patron ar maro mat...

Bez e oa, gwechall goz, wardro ker Landerne, eur c'here; pe, ma kavet gwelloc'h, eur boutaouer-ler.

Devot e oa da Sant-Jozef... Ken devot hag hen a veze gwelet, met devotoc'h ne oa ket aes kaout.

Met siouaz ! ne gemere ket ar boutaouer-ler kalz a boan evit bale war roudou e sant muia-karet.

Seac'h korn e veze alies toull e c'houzog... eva'rae evel eun toull. Derveziennou a-bez a dremene en ostaleriou...; ha, pa zeue d'ar gear, en deveze muioc'h a vall, da skei war ler e wreg, eget war ler ar bouteier, a c'hortoze beza kem-pennet.

Na ped gwech e ranke ar paourkez maquez mont da glask loj gant he bugaligou...

Langachat a rae bep tro ma yae a-dreuz gantañ ar mi-naoued pe an tachou. Hag alies e c'hoarveze kement-mañ, dreist-holl pa veze dija tommet d'ar c'here paour...

Renkenradou « tribleou » ha « nondeou » a zeue gantañ... da lakaat da grena holl ziaoulou an ifern...

Pa veze tost goueliou Sant Jozef evelato, e teue d'ezañ eun tammig furnez... met siouaz, ne bade ket pell !

**

Mervel a reas ar paourkez den. Ne lavar ket d'eomp an istor na pegoulz, na penaos, na perak... N'eo ket gant ar sec'hed, sur oun...

Mervel a reas... ha trumm e yeas da skei war zor ar baradoz.

— A, te eo, eme Sant Per ? Hag e kredez dont da glask loj, d'ar baradoz ? Eur mesvier, eul... lezirek, eul... landore, eul... labaskenn, eul laer-e-vara, eul loper-e-wreg hag e vugale evel-dout-te ? Digeri d'it-te dor palez an Dreinded ? N'emaout ket mat ? Mont a ri alese, ha buan... !!!

Biskoaz n'er doa ar c'here paour klevet eur seurt lita-niou trenk... Ne chomas ket da sinkanat ouz Mestr an Ebessel, buan e chachas e gilhourou gantañ.

Eus korn e lagad, Sant Jozef en doa gwelet pep tra. War evez edo, rak ael mat ar c'here en doa digaset d'ezañ kelou e varo... Ha klevet en doa ivez prezegenn Sant Per... Tre-gernet en doa ar baradoz a-bez...

Ha setu Sant Jozef da gaout porzier an Neñv.

— Aotrou Sant Per, emezañ, gant e vouez ar floura, evel pa gomze gwechall ouz ar Werc'hez hag ar Mabig-Jezuz..., Aotrou Sant Per digorit an nor, mar plij, d'ar paourkez boutaouer-se... Devot bras e oa an den-se d'in me.

— Devot, a lavaran me sur... ya, devot d'an ostaleriou ha d'ar boutailhou. Gwelloc'h e vije bet d'ezan beza devo-toc'h d'e wreg ha d'e vugale.

— Gwir eo, Aotrou Sant Per, met, her gouzout a rit, trugarezus eo an Aotrou Doue.

— Ya da ! trugarezus eo, met just eo ivez. Hag E vara-doz n'eo ket evit ar vesverien. M'ho selaoufen, bep tro, Sant

Jozef, e vefe leun ar baradoz gant pep seurt tud fall. N'eo ket war zigarez m'en deus ar c'here-se devet eun tamm-gou-lou bennak dirak ho skeudenn, e rankin-me e zigemer er baradoz.

— Met, Aotrou Sant Per, c'houi oar pegen fallakr eo ar bed, pegen kreñv techou fall an den...

— Ya, ya, gouzout a ran an traou-se, mat tre, ha meur a dra all c'hoaz war ar marc'had. Met ar pez a ouzon gwelloc'h c'hoaz, eo, ne vo ket digoret dor ar baradoz d'al lampon-se.

— Mat, eme neuze Sant Jozef, o sevel e vouez ivez eun tammig, ma ne deu ket ebarz me a yelo er-maez !

— O, it er mez, aotrou Sant-Jozef... m'ho peus c'hoant mont, n'eo ket me a viro ouzoc'h. Ha n'in ket war ho lerc'h...

— Met, ma 'z an kuit, e kasin ganen kement a zo d'in, ha, da genta, va fried, ar Werc'hez Vari.

An Itron-Varia, galvet gant Sant Jozef, a zeuas raktal...

— Ha kement a zo d'am fried a dle dont ganti, eme Sant Jozef en eur denna diouz e c'hodell eun tamm paper a oa warnañ litanioù ar Werc'hez.

— Mater Christi... mamm ar C'hrist. Hor Salver a zeuy ganen ivez... Regina Angelorum... rouanez an Elez... Alo, an elez, deomp en hent. Regina Patriarcharum... Prophetarum... ar Batriarked, ar Profeted deuit amañ buan... Regina Martyrum, Virginum, ar Verzerien, ar Gwerc'herez... deuit ivez, ha buan !

... Sant Per a oa dija aet teñval e benn. Bremaik, emezañ outan e-unan, ne chomo den ebet ken er baradoz...

Ha sant Jozef a gendalc'he gant e litanioù :

— Regina omnium sanctorum, Rouanez an holl sent, emezañ... Ha setu an holl sent o tont... prest da vont da heul o Rouanez.



An Aotrou Doue, anat d'eoc'h, a wele hag a gleve pep tra...

— Alo ! va mignoned, nag a drouz a zo ganeoc'h. Mat a rit, c'houi Sant Jozef, difenn va zrugarez rak trugarezus oun. Mat a rit ivez, Sant Per, difenn va justiz rak just oun ivez.

Va zrugarez ha a justiz, ken bras an eil eget eben, a renko pep tra. Kasit d'ar gear ar c'here-se... ha p'en devo chan-chet buhez ha graet pinijenn, e

hello dont da skei, adarre, war zor ar baradoz... hag e vo digemeret mat.

Ha setu aze penaos e tistroas d'e di ar boutaouer-ler... da veva ha da vervel evel eur sant.

P.

Kimiad ar Misioner ...

War ar mor bras!

Evel kouşket e oa ar mor bras..., dindan al loar, en he c'hann, o para war: añ...

Kuitaet hor boa Naples, dek dervez a oa. Digouezout a raemp dirak ker Bombay, daoust n'he gwelemp ket c'hoaz.

Eun daou-ugent misioner e oamp war al lestr...

Misionerien koz, bet er gear, o tiskuiza eur pennadig hag a zistroe laouen. « E-touez va fayaned e fell d'in beza be-ziet », a lavare d'in unan a'ezzo.

Relijiused yaouank, Salesianed, danvez misionerien, a yae duhont da beurechui o studi.

Misionerien yaouank, evel-dour-me, o vont da voulc'ha o labour war zouar an dud divadez.

En em vodet e oamp breman war benn-araok al lestr, hag eno, en hor sav, troet war-du douar ar bayaned e karjomp an Te Deum.

Biskoaz Te Deum n'er doa tregernet e kaeroc'h iliz : goulou e-leiz... al loar a skede, stered a vilierou a lintre e bolz an Nenvou; musikou... an tarzou freuzet gant fri houarn ar vag; tud d'hor selaou zoken... en-dro d'eomp e oa en em vodet an dremeni-sebezet holl.

Te Deum laudamus...! Meuleudi d'eoc'h, o va Doue, da veza hadet, en hor c'halon, karantez evit paoura tud ar bed, ar bayaned ! Diouz Ho kalon, war-eeun, e teu ar garantez-se evit ar paour hag ar reuzedik.

Er skolaj eo em eus tarvet, evit ar wech kenta, pegen c'houek eo komz an Aviel : « Evangelizare pauperibus misit me », va c'haset en deus da brezeg an Aviel d'ar beorien.

Bennigit, o va Doue, ar re holl o deus va sikouret da senti ouz ho mouez !

Te Deum laudamus...! Meuleudi d'eoc'h, o va Doue, da veza roet nerz-kalon awalc'h d'in evit kuitaat pep tra. Hep ho skoazell daoust ha gelllet hon defe lavaret kenavo da gement hini a gariemp ?

War ar mor bras ...!

Te Deum laudamus...! Bennoz d'eoc'h, o va Doue, d'hor beza diwallet a-hed hor beaj hir, war ar mor bras. Hor gou-doret ho peus « e disheol ho tiouaskell », hervez komz ar Skritur-Sakr, C'houi, mestr galloudek ar bed-holl...

**

Ya, digouezout a raemp e penn hor beaj...

Sonj a zeue d'in, breman, eus kement pennad-hent am boa graet.

Gwelet a raen diskenn-hent-houarn Landerne, diouz ar mintin, araok goulou-deiz... euriou kalet ar c'himiad !

Tremenet oant an euriou kriz-se, ha breman e tanven al levenez a sav er galon diwar ar sakrifiz graet evit Doue.

Meuleudi d'eoc'h, o va Doue,.... Te Deum laudamus !

Sonj a zeue d'in ivez eus kerig Asiz, kavel Urz Sant Fransez... e oan bet o pedi war e vez.

Rom... ker-benn ar bed kristen, e oamp bet enni digemeret ken mat gant Hon Tad Santel ar Pab.

Gwelet a raen ivez, em sonj, porz-mor Naples. Hol lestr gwennkann oc'h en em zistaga diouz ar c'hae a oa leun a dud warnañ oc'h heja d'eomp o daouarn...

Kenavo'ta, douar Europa !

Ha setu ma tigouezemp breman tost da zouarou ar bayaned.

Te Deum laudamus... ! Sevel a rae, krenv ha c'houek, kan ar visionerien, e-kreiz an noz didrouz.

Biskoaz n'he doa va c'halon tridet kement o kana an Te Deum. En dervez war lerc'h, pa zihunjomp, e oa hol lestr e lenn-vor Bombay.

Dirak hon daoulagad e welemp douarou an Irdez, hor bro nevez, o lintra dindan bannou skedus an heol o sevel.

TAD MARIE-URBAIN
Misioner kapusin.



Dirak ar Boan, petra da ober ?

Ar boan eo lodenn pep den a deu er bed mañ. Met, alies, n'eo ket awalc'h d'eomp gouzanv ar poaniou a gouez warnomp, en amzer vremen, kemer a reomp evel plijadur o sonjal er poaniou hon eus gouzanvet gwechall, hag e lakomp da zihuna, en hor spered hag en hor c'halon, glac'har hag anken hor buhez tremenet.

Gwasoc'h c'hoaz ! Sonjal a reomp, en eur grena, er poaniou a gouezo warnomp, diwezatic'h, en amzer da zont, hag, evelse, e teu hor samm da veza pounneroc'h pounnera. Petra d'ober ?

Gwelomp da genta petra ne gwelomp ket ober.

Evit an amzer dremenet ?

Daoust ha n'eo ket awalc'h beza tanvet, eur wech, eun dra boanius ha kasais ? Perak digas en-dro ar vlaz fall-se ? P'hon eus eul louzou c'houero da gemerout, ne chomomp ket d'e vlaza, n'hen dalc'homp ket pell ouz ar staon; buan e lounkomp anezan, ha peoc'h dioutan. Greomp evelse evit ar boan. Pa vez kleizennet eur gouli, pe warnez beza, arabat eo e skrabat evit e lakaat da wasaat ha da dana.

Arabat eo dihuna an amzer dremen et... nemet evit meuli Doue da veza dizammet ac'hannomp pe roet nerz d'eomp da zougen hor samm.

En amzer goz, p'en deveze eur soudard paket eur bir en e gorf, kenta tra ma rae oa e denna buan ha buan. Evelse ar gouli a c'helle para. Grit kement-all ivez. O trei hag o tistrei ar c'hleze er gouli ne rafec'h nemet e lakaat da wada gwasoc'h gwaz.

Dies eo ! Ya, marteze; met ret eo evelkent !

Setu aze evit an amzer dremenet.

Gwelomp breman an amzer da zont.

Perak huanadi ha lenva war an darvoudou da zont ? Gortozomp ma vint digouezet. Abred awalc'h e vo. Unan a zaou. Pe e kouezo warnomp ar boan pe ne ray ket.

Ma ne deu ket, hor bezo kemeret glac'har ha nec'h evit netra. Ma teu, hor bezo amzer awalc'h evit klemm ha ouela. Pa zeuio ar mare, an Aotrou Doue a roio d'eomp nerz evit dougen hor samm. Gortozomp eta.

Na sonjomp nag en hon trubuilhou tremenet nag er re da zont. Ar sonjou-se a zo sonjou didalvez. Ar seurt sonjou n'hellont nemet hor pistiga.

Met, dirak ar boan hon eus breman, petra d'ober ?

Lavarout komz hor Mestr, Jezuz : « Fiat » Mat eo, bolutez Doue eo, ra vezo graet e volonte. Doue a zigas d'in ar boan, talvoudus eo d'in eta. Mat eo, rak digoll a ra va amzer dremenet, mat eo rak santelaat a ra va devez, hirio. Mat eo, rak pinvidikaat a ray va ene evit ar baradoz. Nag a bec'hejou am eus da baea, nag a zroug am eus graet; ar boan a baeo va die; ha ma n'am eus ket a zle va-unan, e talvezo d'ar re all.

Ha neuze, petra dalvezfe en em zevel eneb ar boan ? Tamall Doue ne dennfe ket eur begad poan diwarnon.

Jezuz, ar Mestr bras, a zo fellet gantan kaout poan; war e lerc'h ha gantan karomp ar boan.

MELEGAN.

Ar ganaouenn goz



« Ar ganaouenn goz a luskelle mabden en e boaniou » (1) : evelse e komze eus ar relijion, Jaurès, mestr-bras sialisted Frañz, arak ar brezel.

Hag ar ganaouenn goz-se ne oa mui, war e veno, nemet eur goz kanaouenn, poent bras lakaat en he lec'h menozioù all, dizoue ha digristen, gouest, emezan, da rei d'an holl « bara, peoc'h ha frankiz. »

Jaurès a zo bet lazet tost da bemp bloaz war n'ugent 'zo, hag « ar ganaouenn goz » a vez c'hoaz, dre c'hras Doue, klevet o sevel da ziskleria ar wirionez n'eus nemeti. Sevel a ra, ha neket hepken e-barz an iliz-zou.

« Petra'welomp dre ar bed en dro d'eomp ? Ar brezel war-nes tarza adarre. Ni a wel o tont eus ar broiou estren eur barr-avel hag a glask diskara tri dra n'hell ket an Amerik ober hepdo, hirio evel en amzer dremenet. Ar c'henta azezo eo ar relijion... »

« Awechou e rank an dud beza prest da zifenn ne ket hepken o ziegeziou, met ivez ar feiz hag ar garantez n'eo savet warno o relijion, »

o bro, o sevenadur (civilisation). »

Eus peseurt kador-brezeg eo nijet ar c'homzouse ? Piou en deus o lavarret ?

N'eo ket eur beleg, nag eun eskob, nag ar Pab. Met an aotrou *Roosevelt*, prezidant Stadou-Unanet an Amerik, dirak kannaded ar vro, — eur vro hag ez eus enni ouspenn kant milion a dud, — bodet holl evit e glevout.

Ar relijion, kenta ha gwella maen-diazeze eur vro !

Petra 'zonjfe eus komzou Roosevelt ar re a felle d'ezo hag o deus klasket, ar re a fell d'ezo hag a glask c'hoaz ober eus ar Franz eur vro difeiz, eur vro « laïque », hag eus ar Fransizien tud hep relijion ?

Petra'zonjo ar re o deus tennet ar Groaz eus ar skoliou hag ano Doue betek eus mojennou La Fontaine; ar re a zisklerie, evel Viviani, e oant o vont da « voucha ar stered », da lavaret eo ar gredenn ez eus eun Doue hag an holl gwirioneziou roet gant Doue d'an dud ?

Petra zonjo ivez ar re holl a zo bet lakaet ganto da fazia, hag o deus kredet e oa echu gant an Iliz hag e vije hirviziken ret mat,

(1) « La vieille chanson qui berçait la misère humaine. »

da gement hini en deus eun tamm spered bennak, beza dizoue ha lezel ar relijion hag an ilizou gant eun nebeudig gwrac'hed koz ha, marteze, gant ar vugale betek o fask kenta ?

O welout stad reuzeudik ar bed, — ennañ dispac'h ha brezel a bep tu, — hag o klevout komzou eun den ken uhel savet, marteze e teuint, gant sikour gras Doue, da zigeri o daoulagad d'ar wirionez o deus nac'het betek hen.

Eur wirionez ez eo koulskoude aes he c'homprenn.

Rak petra'zo ret evit ma c'hello eur vro rei d'he zud « *bars, peoc'h ha frankiz* », evit ma c'hello eur bobl padout ha chom en he zav ?

Dao eo d'ezi da genta kaout en he fenn mistri hag a glasko mad ar bobl a-bez, ha nann o mad o-unan pe hini o amezeien enep hini an dud a zo dindano; mistri hag a zavo lezennou just, graet hervez pep gwir, gouest da lakaat er vro urz vat ha peoc'h gwirion.

Ma n'eo ket ar mistri-se tud a relijion, a oar e teu d'ezo o galloud a-berz Doue hag o deus, azioc'h d'ezo, eur mestr hag eur barner, neuze e c'heller kaout aon

na ziwanfe en o c'halon ar c'hoant da waska o sujidi, pa gavo d'ezo e c'hellint hen ober hep beza diskaret hag e teuy d'ezo dre gement-se muioc'h a c'halloud, a zanvez, a blijadur.

Ret eo, ouspenn-se, kaout sujidi doujus ha sentus. Hag int a zoujo o mistri hag a zento outo, zoken pa vezo pounner ar zamm lakaet war o dioukoaz gant al lezenn, ma kredont o deus ar mistri o galloud a-berz-Doue, hag ez eo eta eun dever stris plega d'o gourc'hemennou.

Ma ne gredont ket ar wirionez-se, int a zizento, raktal ha bewech ma c'hellint hen ober, hep beza gwelet, tapet ha kastizet.

Ha perak, en eur vro hep relijion e sentfe ar priedou ouz lezennou stad ar briedelez ? Ha ma ne sentont ket outo e vezo muioc'h a dud o vervel eget a vugale o tont er c'haveliou, ha setu ar vro war hent ar maro !

« *Pa yeas Rom betek dispriza an doueou, — ar relijion, — neuze e voe diskaret* »; komzou Montesquieu, henvel-tre ouz re Roosevelt.

YANN.

Dalc'hit sonj eus komz Hor Salver : « **MA NE RIT KET PINIJENN EZ EOT HOLL DA GOLL.** » Ar c'horaz a zo dalc'hit sonj mat !

Gouel Maria-Veurz

Ar gouel-mañ eo kenta hini savet en enor d'an Itron-Varia. Degas a ra sonj eus an deiz, ma teuas an Arc'hael Gabriel da rei da anaout d'ar Werc'hez, e oa galvet da veza Mamm Salver ar bed. A boan ma voe echu ar brezel

*Bezit
devot d'ar
Werc'hez vari,
hag e viot
salvet*

didruez, graet gant an Impalared d'ar gristenien genta, ma welomp an Iliz o sevel ar gouel-mañ, hanvet ganti, d'ar marteze, *Gouel ar C'hellou mat*, dre ma roe « *kelou* » en doa Mab Doue en em c'hraet Den.

Digorit Aviel sant Lukaz, hag e welot penaos e tremenas ar burzud-se.

« *Me ho salud, o leun a c'hras eme an Arc'hael; an Aotrou Doue a zo ganeoc'h, benniget oc'h dreist an holl wragez.* » O klevout kement-se, Mari a voe nac'het hag a glasko petra e oa ar salud-se. An Arc'hael a zispleg e gefridi : « *N'ho pet ket aon, Mari; plijout a rit da Zoue; c'houi a vezo mamm, ha c'houi a roio d'ho Mab an ano a Jezuz. Bras e vo, ha galvet e vo Mab an Holl-C'halloudek, hag an Aotrou Doue a roio d'ezan tron David, hag e reno atao war rouantelez Jakob, hep fin ebet.* » Mari a respontas d'an Ael : « *Penaos e c'hoarvezo kement-se, pegwir em eus graet le da chom gwerc'hez ?* » Hag an Ael : « *Ar Spered Santel a zis-*

kenno ennoc'h..., ha setu perak e vo galvet ho pugel Mab Doue. » « *Servijerez ouz da Zoue, eme neuze Mari, ra vo graet d'in hervez ho komz.* »

Nag a genteliou da denna eus ar gouel-man ?

Da genta, mil trugarez d'an Aotrou Doue, da veza bet ar vadelez da zegas d'eomp e Vab Unik, evit hor c'hellenn ha pae dle hor pec'hejou.

Karantez d'Hor Salver benniget, a zo plijet gantan kemerout hor stad ha rei E vuhez evit hor silvidigez.

Enor ha meuleudi d'an Itron-Varia, evit ar vertuziou a welomp o skedi enni da genver an deiz-man : feiz, sentidigez, glanded hag umilite a galon. Ra vezo ar sonjou santel-se en hor spered, bep tro ma lavarimp « *Me ho salud, Mari* », hag e raimp neuze d'ar Werc'hez ar memes plijadur ma reas an Arc'hael Gabriel.

GWASTINO.



Eur gerig, n'eo netra...

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Fiat*, eo deuet ar Werc'hez da veza mamm Doue ha mamm an holl gristenien.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Fiat*, e asantas Jezuz mervel war ar groaz ha savetei ar bed.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Deus*, e voe chachet an ebestel da heul hor Salver.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Nann*, e troas kein ar potr yaouank pinvidik d'an eürusted a ginnige Jezuz d'ezañ.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Klevet eo*, e reas Judaz e varc'had euzus.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Pardon*, e teuas eur bec'herez da veza eur santez.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Ya*, e teuas Saul, enebour touet ar gristenien, da veza an abostol bras sant Paol.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig : *Perak ?* e tizent kalz tud ouz mouez o c'houstiañz, evit tañva blaz c'houero ar frouez difennet.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig kaset a skouarn da skouarn e heller koll brud vat an den.

Eur gerig, n'eo netra... Met, gant eur gerig, lavaret mar-teze en eur c'hoarzin, nag a zaelou c'houero a zo bet skuilhet.

Na lavarit mui : eur gerig n'eo netra.

Er miz

istor « Ribotadenn Yanrik Paotrargear »

a zeu

a vo kontet d'eoc'h gant

lennit !

« Ar Vuhez Kristen »

Katekiz ar re vras

JEZUZ-KRIST HAG E RELIJION

Kenta lodenn : PIOUS EO JEZUZ-KRIST ?

(kendalc'h)

E Santelez

Peurliesad, seul vui ma tarempred eun den, seul vui e vezer tentet da bellaat dioutan, dre ma kaver ennañ techou fall, kalz pe nebeut. Gant Jezuz ne c'hoarvez ket evelse. Ar garantez o deus evitan e Ebestel a ya atao war gresk. Mont a raint betek rei o buhez evitan.

Petra dleomp dreist-holl da veuli e Jezuz ? Diaes eo hel lavaret. Madelez, dousder, umilite, lealded, gouiziegez, furnez, nerz-kalon; kement vad a glaskomp en eur mignon, pe en eur mestr, a gavomp e Jezuz, hep na deufe eun dra ober gaou ouz eun all.

E vadelez, e zouder ne viront ket outan da c'hourdrouz, da sevel e vouez, hep aon, evit kondaoni an displeaded, pa vez ret hen ober. Anaout a ra e vignoned diouz e enebourien, met n'o lez ket d'e zistrei diwar e hent. A-hend-all, ken sur eo atao anezan e-unan, ma na anavez na nec'hamant, nag enkrez, na morc'hed. Eus kement a skiant, a c'halloud ne denn lorc'h ebet. Ken izel a galon eo ma c'hell lavaret : « *Deskit ganin beza izel ha dous a galon.* »

Larkoc'h ez ay c'hoaz. D'ar Juzevien a veze dalc'hmat ouz e spia, evit kaout an tu d'e goll, e kredio lavaret : « *Piou ac'hanoc'h a damallo d'in eur pec'hed hepken ?* » Ha den ne gavo netra da respont.

E daou c'her, eun Den parfet eo Jezuz.

N'omp ket evit kompren mat buhez Jezuz, e-pad an tri bloaz a lakeas da brezeg an Aveli, ma lezomp a-gostez ar burzudou a ra. Graet en deus Jezuz burzudou, netra sur-roc'h. Meur a vil den a zo bet test anezo, ha n'oant ket holl eus e vignoned, pell ac'hano. Ma 'z eo deuet micherour yaouank Nazared da veza, e ken berr amzer, brudet dre ar Jude a-bez, ma teu kement a dud, a bep tu, d'e selaou, ma 'z eo kredet, war e c'her, daoust ma komz alies eus traou kasäus da glevout, diaes da entent, n'eo nemet abalamour d'e vuhez santel, ha d'ar burzudou « *a had war an hent dre ma'z a.* »

Lavaret e ve, e teufe anezan eur vertuz gouest da barea an holl lennejeou.

Jezuz en deus graet burzudou, burzûdoñ e leiz.

Digoromp an Aviel. En dervez ma rôas ar pare da vamm-gaer Simon, « d'an abardaez, goude kuz-heol, a lavar d'comp ar skrivagnerien sakr, ar re holl o doa tud klanv, gant n'eus forz peseurt klenved, o digasas d'ezan. Jezuz, o lakaat e zaouarn warno, o fareas... » Diaoulou ivez a zileze meur a hini. Diou bajenn larkoc'h e lennomp : « Jezuz a erruas dirak lenn Jenezared, hag o veza kavet eno diou vag, e pignas en unan anezo a oa da Ber ha d'e vreur. Rak kement a dud a zeue war e lerc'h, m'en devoa bec'h o vale ganto. Evel ma roe ar pare da galz a dud, kement hini en doa eur boan bennak a glask tostaat outan. »

Larkoc'h c'hoaz : « Pa ziskenjont eus ar vag; tud ar vro, o veza hen anavezet dioustu, a gasas kemennadurez tro-wardro, ha dre ma 'z ae, e tigased d'ezan klanvourien war o gwele... e c'houlenned digantan touch outo gant bord e vantell nemet ken. Kement hini a c'helle touch outan en em gave pare. »

Burzudou a bep seurt.

Klenved ebet ne herze outan. Rei a ra ar gweled d'ar zall, ar gomz d'ar re vud, ar c'hleved d'ar re vouzar. Kas a ra an diaoul diouz an dud dalc'het gantan. St Yann a gont penaos e pareas eun den ganet dall. E amezeien hag ar re-all o doa gwelet anezan araok, o klask an aluzen, a lavare : « Ha n'eo ket hennez a veze azezet o c'houlenn an aluzen ? Hen eo, a dra-sur, a lavare lod. — N'eo ket, a lavare lod all, met unan henvel outan. » Hen, avat, a lavare : « Me eo. »

Eur wech all, eun den lor a dosta ouz Jezuz. « Aotrou, emezan, ma kirit, c'houi a c'hell va fare. » Jezuz a respontas en eur astenn e zorn : « Mat eo, ra viot pare. » Ha raktal e voe pareet.

E Kafarnaum, e-pad ma oa o prezeg, eun den hag a oa eun diaoul en e gorf, en em lakaas da grial, a-bouez-penn : « Lezit ac'hanoun ! Petra ho peus da ober ganeomp-ni, Jezuz a Nazared ?... Gouzout a ran ervat oc'h an Der-Doue. » Jezuz a skandalas an diaoul hag a lavaras d'ezan : « Ro peoc'h, ha deus er-maez eus korf an den-se. » Hag an diaoul, o veza stlapet an den-se d'an douar, a deuas er-maez eus e gorf.

Lenn a ra er c'halonou.

Galloud Jezuz war ar sperejou ha war an dud a ya larkoc'h c'hoaz. Lenn a ra e goueled ar galon ar sonjou muia kuzet.

REP.

Huanadou ar pec'her

1

A vihanik em eus pec'het
Ha disprizet va Doue;
Va ene am eus stlabezet...
O, pebez gwalleur d'in-me !

2

Piou a chenko va daoulagad
E diou feunteun a zaelou.
Ma kavin eun dour dereat
Da walc'hi va fec'hejou ?

3

'Vit eur braoig em eus troket
Eur binvidigez dispar,
Ha n'hellfe ket beza prenet
Gant holl vadou an douar.

4

Me 'zo bet mignon d'am Salver,
E vugel muia karet;
Met breman disent ha pec'her
Da Satan me 'zo gwerzet.

5

O ! perak, Ankou dizamant,
N'out ket deuet d'am gervel,
Pa zougen sae va badiziant
Pe mailhurou va c'have !

6

D'an nebeuta, o va Jezuz,
N'em bije morse sanket
En ho kalon drugarezus
Birou flemmus ar pec'hed.

7


Fals-mignoned da va ene,
Mevelien an drouk-spered,
Nag a zaelou a goust d'in-me
Ho peza darempredet !

8

Da Sant Per ho peus pardonet
Hag ivez d'ar Vadalen;
Va fardonit, Salver karet :
Me 'vo d'eoc'h da virviken !

SEB.

Mision bras Treboul



N'eo ket ledan awalc'h an hent



Sav da droad 'ta, Fani, ma tremeno an aotrou-mañ
gant e garrigellig...